

**SONIOU BREZONEK*****Ar Pilhaouer*****DISKAN**

Foei, foei, foei d'am zammik Aotrou  
Gant e stsup hag e bilhou !

Ma zad en deus va dimezet  
Da eur flerius pilhaouer ; (bis)  
En Lokeffret ez eo ganet  
E komantan Toul-al Laer.

An devez warlerc'h e eured,  
E oa foar e Landerne,  
Ha ma lapous, prim dihunet  
A ya'r meaz eus e wele.

Drailha ra eun hanter Bater,  
Tana ra e gorn butun ;  
Diskrouga ra e grog-poezer ;  
Setu hen war hent Sizun.

Pa oa an hanter-noz sonet  
En iliz vrás ar Fouille,  
Me oa intanvez glac'haret  
Ma unan bars ma gwele.

Mont a ra d'ar vilin-paper  
Gant eur zac'hadig pilhou,  
Kalz buhanoc'h evit eul laer,  
Rak preset eo an daelou.

Pa'n deus kavet Kamarader  
Ebarz eun davarn bennak,  
Meur a vanne en deus even  
'Vil lakat e gof distag.

Ha pa zistro d'ar gomanant,  
Raktal e sav eun tam'm Krog :  
E pelec'h eo et da arc'hant ?  
Me gred emaint en ez kof !

Ma Yannick pa z a d'ar scariou  
A ve dalc'hmad mezo dall,  
Tost e ou da goll e vragou,  
En Montroules, an de-all.

Ma Yannick a zo eun otrou,  
E dog war geste e Benn,  
Ha mar sellfec'h ouz e vragou  
E wellec'h tam'g grochen.

Pa ve pignet war e azen  
Etouez e dammou pilhou.

**Kousk-Breiz-Izel****DISKAN**

Kousk, Kousk, Breiz-Izel bro dispar,  
Setu an noz o tont war an dovar ;  
Kousk, Breiz-Izel, bro ken mat  
Trouw ar mor vrás a zav d'az luskellat

An heoi a zo kuzet, setu echu an de ;  
Me glev ar c'hloc'h o tintal an Ave.

Chouez-vad an ed e bleun hag al lan [alaouret  
War ar meziou gant ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gân o testum o loened,  
Gwersiou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz-Kollet

En traoniennou didrous me glev kân an [costig ;  
Telennner-noz, sonit flour ha dousik,

'Us da Vreix o skedi an nenv steredennet  
A lar'z eus eun Doue ouz hor c'haret.

An nep ac'houez bemdez e chounide repoz  
D'an dud vad Doue en deus graet an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greis kalon m'ho [kar,  
Bro all ker haer n'eus ket war an dour.

(J. Maréchal.)

**Sav, Breiz-Izel !**

Ton henmraeg — « Gwyr Harlech »

Mene-Bre ha Mene Rragou  
O deus distonet hon galvou,  
Gwagen ar mor 'lar d'ar wagen  
Breiz da virviken !

Ar Vretoned a zo kaled,  
Eus eur penn d'ar penn all d'ar bed  
O deus touet diffenn o gouenn :  
Breiz da virviken

Beteg ar gouelec'h ar pella  
Ar c'horn a vrezel a vouda,  
An avel youch en eur dremen  
Breiz da virviken !

Ar c'halonou 'zo entanet  
Hag an divrec'h a zo nerzet !  
Doue, ro an Trec'h d'az mibien :  
Breiz da virviken !

**BRO GOZ MA ZADOU****(KAN BROADEL)**

Ni, Breiziz a galon, karomp bon gwir Vro !  
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro ;  
Dispont 'kreiz ar Brezel, hon tadou ken mad  
A skuilhas eviti o gwad.

**DISKAN**

O Breiz, ma Bro, me 'gar ma Bro.  
Tra ma vo'r mor 'vel mur 'n he zro  
Ra vezd digabestr ma Bro !

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,  
N'eus bro all a garan kement 'barz ar bed.  
Pep menez, pep traouien d'am c'halon zo ker ;  
Enne 'kousk meur a Vreizad ter !